

426

# SON AR C'HIGER

Mar plich ga-nec'h e si - laou-fet, Tra-la-  
 ley tra - la - la ! Mar plich ga-nec'h e si - laou-  
 fet Eur zon 'zo ne - ve kompo - zet.

Eur zonig koant 'zo kompozet  
 D'eur c'higer yaouank ec'h e gred.

Sevel 'ra, eur lun ar beure,  
 Evit mont d'ar foar da Gorle.

'Barz en Korle p'e arriet,  
 Da varc'had ar zaout ec'h e aet.

Hag hen oc'h akordi raktal  
 'Vit eur goz vuc'h, triouac'h real.

'Met ma tivizas, ar pôtr fin,  
 Renkje kavet boutailhad win.

En eun hosteleri 'c'he gred  
 Ar peur-rest demeus ar marc'hed.

An hostizez a lavare  
 D'ar c'higer yaouank en de-se :

« Sav alese, ha ke d'ar ger,  
« Tremenet 'c'hout da vestr kiger.

« Da vuc'h 'zo war ar ru a blad,  
« Astennet e he fevar zroad. »

Ar c'higer yaouank a lare,  
Kichen ar vuc'h pa c'harie :

« Me werzo eur skoed pep kartier,  
« Hag he c'hroc'hen chomo en ker. »

Yan ha Jakez 'zo diredet,  
Da c'hout petra 'zo c'hoarveet.

Ar c'hi a harz, ha Yan a vout !  
Labour awalac'h o deus tout !

Labour awalac'h o defoa,  
O sevel ar goz vuc'h er c'hra.

Pa oa ar c'hra ganti savet,  
War ar plen o deus baleet.

Ar c'higer yaouank oa seder,  
O kerzet entrezek ar ger.

Laret a re, en eur ganan :  
« Eun devez mad a c'honean. »

« Eun devez mat 'meus goneet,  
« Waz a ze d'an hini 'neus ket ! »